

D I S P U T

ETRE AR PAPERER HAC AR PILLAOUER.

Var un ton nevez.

Avet emeus ur matier hac a so excelant
Evit formi un disput ervez va zantimant
Var sujet ar Pillaouer hac ar Bapererien,
Abalamour d'o etat ha d'o antretien.

Ar Pillaouer da gomanç a renq mont da vale
Deus an eil paros d'eben, deus an eil ti d'eguile,
A het ar pemzec devez da zestum ar zamou
Da veva en paourenteze, da loja er c'holo.

AR PAPERER.

Ha ni er velin-baper a so prisonnerien,
Qen attantif hac ar môr e pilat e c'hourlen,
E ma pepini ac'hanomp fidel en e etat,
Abred eus ar mintin hac eus nos diveat.

AR PILLAOUER.

D'ar c'houls a ma ves eus tol e tebri, oc'h efa,
O vont d'an hostaliri pa gueres da roula,
E vemp en extremite o vesq an dour hac ar fanq,
O sournis dit labour da c'hounit da arc'hant.

AR PAPERER.

Petra so cos ma souffres qement a baourente

A guement a viseriou hac a gomzes ané;
 Panevert ma profités ha ma c'heus gonit mat,
 Ne a so sur e teufes da rénonç da hetat.

AR PILLAOUER.

Ma ve ni en eur gleffe da renonç d'on etat,
 Dre va feiz a Billaouer, te a ve rentet plat;
 Na rafes qet a regaliou nac eva cals a vouin :
 Evel ma vanq ar pillou ne val qen ar velin.

AR PAPERER.

Ne vo qet se ampecho ar velin da vala,
 Rac re a Billaouerien a zo dre ar vro-mâ,
 Hac en instant ma vanqi, daou al a deuo e plac,
 Hac e czai da dam bara gant da vignonet bras.

AR PILLAOUER.

Pa erufomp er velin ha pa momp disamet,
 Ar mestr a deui da boeza ha ni a yel da sellet,
 Hac omp sur e tigasso cant da bêvar-uguent;
 Divar ar sam a dri c'hant e savo tri-uguent.

AR PAPERER.

Ha te a zo bet guelet en hent o tisama,
 El lèc'h ma veles ur poul, en digare dressa.
 O c'hlebia finamant ar c'hreis eus da sac'hat,
 Ha demp-ni d'o sea qeit ha pa vent sec'h mat.

AR PILLAOUER.

En em glêvomp assambles da laret un tol caer:

Unan ac'hanomp so fripon hac un al a so laer;
 Tachomp d'en em-glèvet evel camaradet;
 Etre ma pado labour e c'honfomp hor boued.

AR. PAPERER.

Penevert ma ven re bel, em bije expliqet
 Eun nombr a etadourien hac a artisanet,
 Pere a vev excelant epqen gant ar paper,
 O deus mui a estim en qær ha var ar mæz.

Un Avocat, ur c'homis hac ar poetrianet,
 Un Noter, ur Procuror, ar Greffier ha Jujet,
 Qement o deus discamant, evit lavaret ber,
 O deus o avançamant dre vertu ar paper.

Neuze c'hellomp laret e zeo én ar c'haera
 A guement so invantet gant an dud er bed-mâ,
 Rac scrifa rer varneàn oll afferiou ar bed,
 Qercouls an dristidiguez evel ar joaustet.

Ar mestrou papererien o deus gretmarc'hajou
 Eus an Negociantet partout dre ar c'hæriou,
 Da fournissa paper pepini en e blaç;
 Paea ha beva o zud a goust dê madou bras.

Pa roul ar c'homers gante er melinou-paper,
 N'en deus etat er vro-mâ evel ar paperer;
 Excelant e zint bevet, ha pæet ar c'haera,
 Hac ur voutaillat bep sul a allont da efa.

Ep ober gaou eus o zud, deus o gonideuez,
 Derc'hel o zi en rapar ep cavet dienez;
 Beva greg ha bugale evel ma zeo dleet,
 Me lavar è an dud-mâ mestr an artisanet,

Abaoue ma zon e vale, c'hoec'h vloas yavnuguent so,

Emeuslaqet imprimanombr bras a chansoniu,
 Epm'am eus biscoas clasqet arfèçon da gompreñ
 Dont da riuma eur chanson evit ar bapererien.

Ar yaou al lard o loja e melin Pont ar Vern,
 E ti Yan-Frances ar Moen hac e ouvrierien,
 O coania hon eus sonjet ober conclusion
 E qevjomp e voa util composi ur Chanson.

POR AR MOULLOU.

Ha me a ra ar moulou hac a so necesser,
 A nez na ve get formet ar feuillennou paper;
 Ar marichal hac ar c'halvez a ra pressiou d'o
 goasqa.

Hac an oll venviagion evit al labour-mâ.

Evel ma vo imprimet ar zon-mâ var haper,
 En Qerne, hac en Leon, ha dre oll en Treguer,
 Er c'hæriou ha var ar mez e vo distribuet,
 Ha eanet a yeez huel etouez ar Vretonet.

An ini vo curius a dégayo da e'houlen

Piou en eus grêt ar Chanson var ar Bapererien :
 Yan ar Guen eus a Dreguer, natif a Bloug
 Echom e paros Plouguiel abaoa ma voayez.

F I N.

D I S P U T

A N A N H A C A R G O U A N.

Var ton : *An Dour hac an Tan.*

SELAOUIT gant plijadur hac e clêfot canân
 Un Disput grêt a neve etre'n An hac ar Gouân ;
 Ha goude ma vo scrifet , ar blijadur d'e len
 A dalvo trivac'h diner ha daou liard ouspen.

Ar pen qenta a vis Dû , er bla pemp varn-
 uguent ,
 Un tri pe pêvar deves goude gouel an Oll Zent,
 E creiz entre diou amzer o tont da explica :
 Unan anê o commanç , un all o finissa.

AR GOUAN.

Bonjour dit , va mignon : échu è da amzer ;
 Deut òn da congedia ; me , è tad ar viser ,
 Ha ro din da bouvoar da gommandi partout ,
 Cede aze da gonge , qæ pa guiri en da rout.

AN AN.

Ro din ar bacianté da visca va dillat ,

**Illa selaou ganén amàn vir rëson val benac ,
Qent m'en em disbartifomp an eit éus eguale ,
Raç divar ar pèvar mis e teuin adare.**

AR GOUAN.

**Bea e vo da broset e tont d'am reson ,
Rac ar memes cabiten a deu d'or c'homandi ,
Hac en deus laqet ar bla etre diou bortion ,
Hac hon eus peb a anter aneàn , va mignon .**

AN AN.

**Me meus renet va amzer ep bea scandalet ,
Hac an oll venagerien so en em bourveet ;
Destumet ar bara , ar yod hac ar c'hrampoes ,
Na ve netra em dilerc'h nemet ar patates .**

AR GOUAN.

**Me so laqet gant Doue da gonsomi madou ,
Ha da laqat union entre ar priejou :
Ar re ve dispartiet etre ma pad an ân ,
A veler oc'h assambli pa erru ar gouan .**

AN AN.

**Pa leveres ar virione , ne allàn qet differi ,
Un dra hac ameus golet a allàn da assuri :
Golet ameus dre domder ar separation ,
Hac a deu da assambli aroc ar yenien .**

AR GOUAN.

**Te sonje dit va zremen partout vit ur gaouyat ,
Ar rësoniou a layares a so tout placet mat ,
Evel pa vent dibabé gant un den a studi ,
Tremenet er seminer ha prest da vèleui .**

AN AN.

Pa è guir en ur gontes un doctor qer savant,
 Gra un dessination amâ en un istant:
 Lavar dîn piou ac'hanomp eo an anciena ,
 Ma leveres ar virione , e teuìn da blega.

AR GOUAN.

Ar memes oad a zougomp , hac e zomp
 destinet
 Ha laqet var an douar ac'hann da fin ar bed
 Gant Doue e peb amzer da ober hon never :
 Te è mam ar blijadur , ha me tad ar viser.

AN AN.

Ne allàn qet da dremen crenn evit um azen ,
 Rac proposiou excelant a zorti eus da ben :
 Respont a res ac'hanon demeus ya goulennou ,
 Qen a laqa va fizianç e zê mad da gomzou.

AR GOUAN.

Evel ma vanq da grédi d'ar pez a lavarân ,
 Ne po qet ar blijadur o vont control dezân ,
 Rac me rayo ibillen da stouva da doullou ;
 Beva ellomp assambles evel camaradou.

AN AN.

Mar beomp camaradet , e renques consanti
 Eo brassoc'h va fouvoar evit nan dê da ini :
 An dud hac an oll fleuriou en àn so ravissant ,
 Hac ar gouân o dissip hac a ra o zourmant .

AR GOUAN.

Mis-Dù-mâ ha mis Qerzû è an daou vis dour,
 Mis-Guenver ha mis C'huevrer etre daou ar
 sec'hor ,

Ha mis Meurs ha mis Ebrel a zec'ho ar poullou,
 Ha mis Mae a zigasso ar poultr en o flassou.

AN AN.

Tao din amzer didalye an oll a so charmet
 O clèvet o hechui da joa ha da respect ;
 Den ebet na lavaro : maro è ar paour qès ,
 Hac e ve var an douar aneàn dienes.

AR GOUAN.

Finissomp hon discoursiou hac hor c'hom-
 plimanchou ,
 Evel ma finis un'an , un all a gommanço ;
 Rac en An pe er Gouân e zoimp e peb amzer
 En disän ar blijadur ec'h êru ar viser.

An ini n'eus compost an Disput a neve ,
 Etre ma teanno e alan e pado e vue ;
 Pa glêfot e zo maro , lavarit ur beden
 En delivranç da ene ar C'hanel Yan ar Guen.

F I N.

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.